

P. 35.015
19

AVANTURIU
UN DEN YAOUANQ.

A VREIZ-IZEL,

*En pere e veler dabord an Amour
e qemer e nerz, goude e vlancat dre
an dezir da studia, goude-se e fleurissa
gant mui a gourach, en fin en er gueler
disc'hrizennet, hac an daou zen yaou-
anq separet goude o ol amitie.*

Var an tonniou a zezisfot.



E MONTROULEZ,
si FEDAN, Imprimer e traou ru ar Vur.



AVANTURIOU
UN DEN YAOUANQ

A WREIZ-IZEL.

TOSTAIT, ol tud yaouanq pere form amitie;
Da c'hout penos e comanç hac e coe adare;
Rac me a so den yaouanq hac am boa-i formet;
Qen an de hirio an de n'am boa-me he c'huitet.
Nep a lavarje din me, brema eus ugent mis,
E coejen er chadennou demeus ar yaouanqis,
Me a respontje dezàn gant un ér a goler:
Ne gredàn qet ve merc'het am grafe prisonier.
Ebien, va breudeur yaouanq, bet on en o frison;
Amaret gant o lassou bete griou va c'halon;
En ur joa, en un trionf, en un douster barfet:
Neus qet a voelloc'h jolier vit ma zeo ar merc'het.
Jolieren ar prisoniou a so cri ha cruel,
A ro côlo da gousqet d'an nep so prisonier;
Mes er c'hontrolar merc'het p'o devo ho chadennet
A roi dec'h eus o guella, mat bras int da garet.
Evit clasq dec'h ur portret demeus o amitie,
N'en deo qet ret dij sevel ermes eus va goele;
Chom a allàn em zomder, pa na meus qet a c'hoen,

AR PLAC'H.

Ho fianç o poa laqet mad,
 Ma consant va mam ha va' zad,
 Cassit ur re beteq ene
 Ha gaout an eil hac eguille,
 Ha dious ar respont o po bet
 Me a yel ganec'h d'o haouet.

bis.
bis.

AR GOAS.

Casset emeus betec ene,
 Betec an eil hac eguille,
 Da gaout ho lignes enorabl,
 Evit caout o bolonte vad,
 Da gaout ho gerent en daou du,
 Tout e tolont ar brald dec'h-u.

bis
bis.

AR PLAC'H.

Mar de guir ar pez a leret,
 Me a ya ganec'h d'o c'haouet.
 Bonjour, va mam, bonjour, va zad,
 Cetu amân mab un osac'h mad
 Presantamant eus va goulen,
 Emon e creis e c'hourc'bemen.

bis
bis.

AN TAD HAC AR VAM.

Mar doc'h o taou en em choaset,
 Ho tispartia a ve pet'het;

bis.
bis.

a ro deoc'h hor bennos hon daou,
fac un nebeut eus hor madou;
Ret e vo comz d'an otrou Cure,
Da rei d'ah daou den-màn o liberte.

FIN.

